

## An difenn broadel hag ar c'hefridiou

1. **Prezidant ar Republik e-penn an difenn broadel** ; gellet a ra diviz implij an arme nukleel. Emañ e-penn Kuzul an Difenn, e-barzh siviled ha soudarded, lakaet e-pleustr ma vehe disklêriet ar brezel.

Bep blezad e vot ar Parlamant ar budjed evit an Difenn ha lezennoù ar programm milourel. Nemetañ c'hell diviz evit ar brezel.

- Prezidant ar Republik e vez e-penn an armeoù hervez ar mellad 15 ag ar Vonreizh.
- Termeniñ an difenn broadel : an arme-zouar, an arme-aer hag ar jañdarmiri.
- 3 c'hefridi fiziet : \* bout prest e kement degouez d'ober get an nerzh-disaliñ
  - Gwareziñ ar boblañs hag an tiriad broadel
  - Sikour derc'hel pe adsevel ar peoc'h get sikour an ABU.

Ar geodediz : a rank kemer perzh en Difenn broadel dre ar c'hoñje. Tennet eo ar c'hoñje-ret abaoe 1997 met emañ hiziv-an-deiz JAPD( Journée d'appel de préparation à la défense)Donet a ray a-dal miz gouere 2010 an deiziad Difenn ha keodedouriezh. Du-hont e vez kinniget deoc'h testoù priziñ àr ar galleg , kinnig an difenn broadel, kinnig deoc'h micherioù ha nerzhioù difenn ar vro.

## 2. **Kefridioù an difenn broadel**

- Kefridioù hengounel difenn ar vroad : gwarantiñ a ra surentez hollad an tiriad broadel en ur ziwall doc'h ar boblañs èl ar plañ Vigipirate lakaet e-pleustr goude gwalldaolioù àr zouar Amerika.
- Difenn broadel rol mab-den a-benn skoazelliñ ar boblañs pa vez darvoudoù naturel èl dour-beuz e Vendee get ar gorventenn Xynthia. Gwareziñ a ra ar c'hallaoued en estrenvro.
- E-barzh an NATO e vez Frañs met e vez emren evit he difenn. Eze-pad eo ivez e Kuzul ar Surentez en ABU hag e vez ivez ar gwir veto.

Kemer a ra perzh an Difenn broadel e-barzh kefridioù edan kemenn etrevroadel : pal eo lakaat da dalvezout àr al lec'h ar pezh a zo bet divizet get an ABU èl er Balkanoù e Bosnia, e Serbia e 1999 Kosovo, en Afrika( Etiopia, Sierra-Leone...).

- Kefridi bezañs ivez : emglev kenlabour sinet pe difenn sinet etre Frañs hag ur Stad arall èl e Tchad, Kameroun, Senegal.

*La solution ne sera pas seulement militaire. Notre objectif est clair : donner aux Afghans toutes leurs responsabilités dans leur pays. Là-bas, nous ne sommes pas en guerre contre quiconque : nous construisons la paix. [...] N'ignorons pas les progrès accomplis en matière de reconstruction et de développement. La coalition a construit des routes et des canaux d'irrigation, elle a creusé des puits. Elle a fait baisser de 26 % la mortalité infantile. Le nombre d'enfants scolarisés est passé de moins de 1 million à plus de 6 millions en six ans, dont 2,5 millions de filles. Il n'y en avait aucune en 2001. 80 % de la population a accès aux soins. Ils étaient 8 % en 2001. Des élections libres et démocratiques ont eu lieu, où pour la première fois les femmes étaient appelées aux urnes.*

*D'après Bernard Kouchner, Ministre des Affaires étrangères et européennes et Hervé Morin, Ministre de la Défense, Le Monde, 29/08/2008.*

Klozadur : abaoe emglev Maastricht eo bet kaset àr-raok ur politikerezh surentez boutin en Unvaniezh Europa. An emglevioù Schengen a gas àr-raok ur c'henlabourerezh etre ar boliserien enep d'ar trafikerezh dramm, ar felliezh, ar sponterezh hag an dorfederezh. Gellet a ra an nerzhioù-brezel kemer perzh e-barzh an NATO èl er C'hosovo.